

*CANTIC Spirituel en enor dan Itron SANTES  
ANNA Venet, Var Ton Garnilis.*

**D**Re ur c'honcer ravissant formomp ur vers nevez  
Da gana jojeuzamant assambles gant an Elez,  
Da ziscleria dar bobl madelez un Doue,  
A ra deomp er Bozenou tresor a garante.

Mæs quent avanc davantaich goulennomp ouz Doue  
Ar sicour an assistanc sclerigen deus an En;  
Dre intercession ar Verç'hes graç ar Spereç-Santel,  
Da gomposi ur c'hantic da gana e breiz-Izel.

Difoloet a so breman en Escopty Guenet,  
Ebars en ur parc labour en parres Pleuneret;  
Un imac'h miraculus eus a Santes Anna,  
Gant Nicolazic den just residant en plaç-man.

En em rejouissomp christenien trugarecomp Doue;  
Ara dimp dre e buissanç graçou bemnos ha de?  
En Escopty a Venet breman o distribuer,  
Deomp a galon da chounit Indulgeançou Plenier.

Er bloa mil pevar-c'hant pemp varnuguent assuret,  
Er seizvet de a vis Meurs ema bet dissoloet?  
Gant Jouen Nicolazic ha pemp den a deston,  
Ebars en eur parc labour hanvet ar Bozenou.

Roue ~~de~~ Rouanezet, Marquizien ha Baron,  
A zeu da c'houlen sicour da bep affliction?  
Ha n'in pedomp-hi ivez gant garantez parfet  
Ar graçou principala avo deomp accorder.

En Escopty Venet, ul leo diouz an Alre,  
Er barres a Pleuneret a drugarez Doue;  
Ema an tresor precius, ar vamen ha vuez,  
Soulaic'h ha yec'h et der chorf ha buez dan ene.

Ar seizvet de a vis Meurs, en dez ma oue cavet,  
He eus Indulgeanç Plenier, e Santes Anna Guenet  
Ar chuec'hvet de var-nuguent, a vis Gouverc;

2  
Ema Gouel Santes Anna hac er solemnite.

Eirus eo ar pec'her a obten ar pardon,  
O tont da Santes Anna, deus a greis e galon;  
Un tenzor precius eo, deus ar graçou Spirituel  
Da vonet dirac Jesus, pa garo hor guervel.

Pa erruet e Santes Anna, quèrzet gant carantez,  
D'adori er Sacramant Jesus guir Vap Doue;  
Goulennet gant Santes Anna: ar Vere'hez hac e Map  
Ar graç evit ma alfet ober, or Pardon mat  
Et da ober neuze deus ha greis ho calon,  
Herve ma eo ho tever or guir Proteffion,  
Tacher da ober neuze gant guir gontriction  
Ur Goession parfet ha guir Gommunion.

Evit gonit an Indulganç: azo a Rom accordet,  
Eo ret beza pardonet demeus o oll bec'her,  
Roet an aluzon dar paour, pedet ha goulennet  
An oll graçou Spirituel a vezo deoc'h accordet.

Quent evit quitat ar plaç man: deut da drugarecaat  
An Itron Santes Anna, ar Vere'nes hac e Map,  
Leveret adieu Santes Anna, tenzor a Vreiz-Izel,  
En heur divezan ma sicouret pa vezin prest da vervel.

Pa viot pel diouz he Ilis Saludet ha Galon,  
Var benn o taoulin Santes Anna ho Itron;  
A song demeus ar graçou ho pezo recevet,  
Ebars er Pardon Santel pa zouc'h deut de guellet.

Laquet en ho Speret bemnos ha bep mintin,  
Da bidi ha galon gant carante Divin,  
Santes Anua benniguet mam dar Vere'hes Vari,  
Ha chui a recevo sicour vras diganti.

Santes Anna benniguet, m'ho-supli hac o ped,  
Pedet evidomp Jesus: e Pales an Dreindet  
Evit goude hor maro ma zaimp oil da repos,  
Gant ar Sent hac an Aëlez he gloat ar Barados.

*AMEN. Santes Anna pedet Evidomp.*



*CANTIC Spirituel composet e gloar an Autrou  
SANT UGEN en deus ur plag Santel e Par-  
res Ploveil en Escopty Querne, eleac'h ma ra  
nombr bras a viraclou en andret ar re er ped gant  
carantez, ar pardon hac an Induheangou Plenier  
ar Sul quent Gouel Yan, Var ton Genp-vefa  
pe Var ton Quadry.*

**T** Ad Eternel, me o Supli, Dre an hano a Jesus-Christ,  
Roet din ar c'hrac dre o carantez,  
Da finissa erfat va buez.

Speret-Santel me o supli, Dre intercession Mari,  
Roit din o graç a sclerigen,  
Da ober ur chantic dar gristenien.

Autrou Sant Ugen benniguet,  
Pa oc'heus bet gant Salver ar bet,  
Ar graç da preservi var an douar?  
Arre o ped diouz an gounar.

Quemense am oblig breman,  
Dre ar sujet deus ar vers man  
Da sont d'ho pidi a galon, Pa zoc'h da Zoue guir vignon.  
Ar chantic ma Christenien So composet da Sant Ugen,  
Dre ar c'hrac a Zoue an Tad, Hac inspiration va El mat.  
Mas quent evit avanç davantaich,  
Clevet an oll maleuriou bras?

A so er bloaz-man arruet Gant cals a dut hac a loenet.

En Escopty eus a Leon, Ranna ara siouaz va c'halon

E velet ar maleuriou bras En deus bet groet an arraich.

E Ploncour e Commanna, Ec'hoarvet ar maleuriou ma,  
A so tost da venez Are; Approuvet mat eo quemense.

En Escopty deus a Venet,

C'hoarvet er vogal ma ententer,

Er Forest vras a Vranguili E eus clanvet daou vlei anni.

En Escopty eus an Naonet, Maleuriou bras so arruet  
 Cals a dut a so devoret; Gant or vanden c has arraget.  
 En Escopty a Sant Briec Cals a dut a so estonet,  
 Gant ur blei a oue arraget, Cals a dut a so perisset.  
 En Escopty deus a Roazon Calet evise har Galon,  
 O velet ar goad er redeç : Gant an dut a oue devoret.  
 En Escopty a Landreguer, Un nosves pevar quemener  
 Daou hane a so surprenet, O velet ur c'hi arraget.  
 Daou ane a sougue gant respet,  
 Alc'hue Sant Ugen benniguet.  
 An daou se a so bet presevet An daou all so bet devoret.  
 Tri c'hrouadur e c'houarn loenet,  
 E Plevin tost da Sant Briec;  
 Daou aneo a so devoret, Gant daou guy a voa arraget,  
 Tad unan deus ar vugale, Endoa prenet an alc'hue,  
 Deus a Sant Ugen benniguet Raçtal endeus an presevet.  
 Un den avoa bet er Pardon, E Quelven gant devotion,  
 O retourn dar guer var an hent bras;  
 E rancont ur c'hi en arraic'h.  
 An den man a gommanças neuze,  
 Pidi doue var an alchue,  
 Eus a Sant Ugen benniguet Raçtal em a bet presevet.  
 Un den avoa bet o labourat,  
 Pa retorn dar guer deus ar parc  
 A rancontras ur c'hi arraget, Prest da zevori e briet.  
 Tostat a reas outi neuze, Roi aras dezi an alc'hue,  
 Eus a Sant Ugen benniguet; An daou zen a so presevet.  
 Ur batimant var ar mor bras Enem gavas e danger bras  
 O madou a martolodet, E voant oll prest da vea collet.  
 Unan deus ar vartolodet, A zougue gant enor ha respet  
 Alc'hue Sant Ugen benniguet, Emaint dre graç presevet.  
 Impossible eve din compren,  
 Miraclou an Autrou Sant Ugen,  
 En deus gret partout dre ar bet,  
 En andret ar re o deus en pedet.  
 Cals a dut en deus presevet,

5

An Autrou Sant Ugen Benniguet,  
 A c'hoas e raï bemde, Da nep er ped gant carantez.  
 Pedomp a galon barfet, Dougomp e alc'hue benniguet,  
 Ni vezo gantan preservet, Dioc'h c'has clan hac arraget.  
 An Alc'hue ma Christinien A voadigacet da Sant Ugen,  
 Gant un El deus ar firmamant, Pa voc e peden ar Sant.  
 Ha goude an amser se, Ema dre Brovidanç Doue;  
 He ma chomet e Breiz-Izel, Er barres so hanvet Ploveil.  
 Ema var vord ar mor bras Na gaver quet santeloch Plaç  
 A dost dar guer eus a Voayen,  
 Ema Ilis an Autrou Sant Ugen.  
 Ni hon eus ar bonheur Breiz-Izel,  
 Me ma batisset ar Chapel; Da Sant Ugen Benniguet,  
 Un tenzor bras dar Bretonnet.  
 Mar fel deoc'h caout remission,  
 Demeus o pec'hejou Pardon,  
 Deut oll ar Sul quent Goael Yan  
 E zeus Pardon er Chapel-man.  
 Autron Sant Ugen Benniguet Sicouret an oll Vretonet,  
 Pere a zoug a vir Galon, E Alc'hue gant devotion.  
 Evit goude ma viomp bet Guenoc'h er bet-man ficouret  
 Ma or bezo ar bonheur d'o quelet,  
 Etouez ar Sent hac an Elez.

F I N



## CANTIC SPIRITUEL

*En enor dan Itron Varia à Guelven he deveus ur  
 Plaç Santel e Parres Guern' en Escopty Guen-  
 net. Vor ton Sant Servais.*

**M**E ho supli, Bretonet, didostaet da glevet  
 Ur Cantic spirituel a nevez compoiet,  
 Dan Itron Varia a Guelven a ra Miraclou bras,

Er pevar chorn deus er bet ne devez quet he far.

Impossibl eve d'un den rein james danavet  
Er Miraclou a ve groit e Quelven benniguet,  
Rac nen deus quet dez er bet neve guelet enno  
Miraclou bras a bep bro pere ve groit enno.

Me goms deoc'h deus un Ilis hep laret gaou er bet,  
'Ar gairon so batiffet e mesq ar Vretonet,  
Hac eno eve guelet Miraclou nos ha de,  
Gret dan Itron Varia Guelven dre graç Jesus Map Doue.

Pa gaver oll ar sicour e Quelven benniguet,  
Ret e mont a vir galon d'he Chapel de guelet,  
Ha pedamp hi a galon dre garantez parfet,  
Er graçou a oulennemp avo dimp accordet.

En Escopty a Venet er Barres hanvet Guern;  
Eno emä er portret dan Itron Varia Quelven;  
Eno emä he Fortret he Imach beniguet,  
Deomp-ni oll, Bretonet, ar un dro guelet.

A Leon hac a Dreguer a Guerne a Venet,  
Me ho supli, Bretonnet, da zonet d'e guelet,  
Me ho supli Bretonet, da sonet ha galon  
Dre garantez da Guelven da ounit er Pardon.

Me ho ped martolodet, pere a ya ar er mor,  
Deit dar pardon da Guelven pen de digor an nor,  
Ha pedit-hi a galon dre ur guir garante,  
Hi bedo he Map Jesus evidomp nos ha de.

Entrezoc'h Arvotision, pere so custumet,  
Da zonet lies dar pardon da Guelven beniguet,  
Ne gollet quet hou couraich eus a greis hou calon,  
Deit bepret de visitein dre vir devotion.

Da Vouel Maria creis-Est, evit ma hantantet,  
Ema certen ar pardon e Quelven beniguet,  
Ha quement Gouel Maria ve en durant er ble,  
Eve en Ofic divin er Chapel santel-ze.

Ha pep Sul quenta er mis, chelaouet Bretonet,  
Eve an Offeren-bret e Quelven beniguet;  
Ha bamde Overennou er Chapel santel-ze,

Da honori ar Verc'hes zo guir Vam da Zone.  
 Ha deziou ar Sacramant, chelaouet Bretonet.  
 E casser er Sacramant, da Quelven beniguet,  
 Bet en amfer e garo, e ver acoustumet  
 Da gafs he Mabic Jesus der Verc'hes beniguet.

Offeren-bret ha Gouperou ve eno en de-ze,  
 Benediction Doue pehany ve goude  
 Orglogeou er Verc'hes e son e pep amfer,  
 Adrein he Map Jesus a ve ar en Auter.

Quelven so ur Plaç devot mar deus ar en doar.  
 Batisset ar ur menez dirac an hiaul pe bar;  
 Me hou supli Bretonet, de zonet d'e guelet,  
 Hac velehait un Ilis er cairan so er bet.

Hui houe clevet laret, ha me quer-couls ha hui;  
 Ere vo devot de Guelhuen, vou ficouret gat-hi  
 Ar en mor, ar en doar, e quement leh a vou,  
 Mar doh devot de Guelhuen Quelhuen hou sicouro

Hi e des bet er pouvoer guet he Map biniguet  
 Euit digafs er guelet der re ne velont guet,  
 Ha de zigafs en inet-der re ve affliget,  
 Ha de zigafs er vuhe der re ave budet.

Chetu breman, Bretonet, er recompan oheus hui  
 Euit donet de visiter Chapel er Uirhies Vari,  
 Avancet houah hou pasieu de zonet d'e guelet,  
 Dre graç he mabic Jesus hui vo recompanset.

Toftait breman, Bretonet, ha hui gleou ur miracl  
 A zo bet groit guet Quelven ha guet Jesus he Map,  
 En andret ur Batimant pehani oe ar er mor,  
 Oe en-bi pevoar hant dein hac a yai tout de gol.

Pe velissent er Batimant o vont zaon er mor,  
 Hac int goulen ar Verc'hes de zonet dou sicour,  
 Hac int goulen ar Verc'hes d'ou sicour en amse-ze  
 N'ou devoe quin esperanb meid a gol hou buhe.

Pe oent bet en um gloestret e Quelven biniguet.  
 Ar vern er Batimant e voe disquennet,

Hac he Mabie Jesus gathi deit evit he ficour ;  
De zével er Batimant a oe eit da zaon er mor ;

Pe Javas ar Batimant ha tout en dut enni ,  
Neze souden e velesent Corf er Verc'hes Vari ,  
Hac int monet den daulein evit trugairecat ,  
An Itron Varia Quêlven ha Jesus-Chroïst e Map.

Pe ve ret d'un dein croihhuin oll miraclou Quêlven  
E ve ret cavet ul levr a hanter cant solen ,  
De lacat er burhudou e des-bet groit bamde ,  
Tregont-mil pemzec miracl a oude dau gant vle.

A nep aya da Quêlven da onnit er pardon ,  
A vel ol er miraclou e troein er procession ,  
Deu gant-u pevarzec miracl a oe abars ar lanne ,  
Hac aoc groeit guet Quêlven oll an durant er ble.

Bamde e ra miracleu er Verc'hes benniguet ,  
Ar er mor , ar en douar , de guement dein e fed ,  
Hac evelse , Bretonnet , pedit hi alies ,  
En Itron Varia Quêlven ne vanquai doh jamas.

Ema abarh er porehet duch hou dignemeret ,  
Hac hi quer cair el en hiaul , loer hac er steret  
Digor he divrec'h guet-hi evit hou tignemer ,  
Dvit hou miret duch drouc ha duch pep fort danger.

Itron Varia Quêlven , distroeit hou teulagat  
Duch en oll Bardonission aza a galon vat ,  
Pere so accoustumet de zonet d'hou quelet ,  
Itron Varia Quêlven n'hou abandonet quet.

Itron Varia Quêlven . me hou ped a galon ,  
D'ober ur sel a drue duch hou amilion ,  
Guern Melrant ha Lomaleu , Malguenac ha Bubri  
Baud pleniau , Qistinic nac er guer a Bondi ,  
Deit de bedein a galon dre ur guir garante ,  
En Itron Varia Quêlven d'ou ficour nos ha de

Arca eta me breder , a hui me Hoerezet ,  
Laramp oll pep a Bater de Quêlven biniguet .  
Pedamp-hi a vir galon dre ur guir garante ,  
Hi bedai he Map Jesus evidomp nos ha de

F I N.